

PENHOUARN

---

# AR C'HERNEVAD CHIMINAOU

(Le Cornouaillais Chemineau)



REDON

IMP. RÉUNIES A. BOUTELOUP ET FILS AINÉ, RUE VICTOR-HUGO

—  
1907

# **AR C'HERNEVAD CHIMINAOU**

(LE CORNOUAILLAIS CHEMINEAU)

## **2<sup>e</sup> Prix du Concours de Gwerz**

*War an ton latin : O Jesu-mi, Jesu-mi, Deus meus*

Oh ! pegen Kaer  
pegen Kaer  
eo  
Ma Bro.

Breiziz an hent houarn, Breudeur Chiminaoued  
Graet d'in me an enor da zont d'am selaouet.

Me a displego d'ac'h (bis)  
Me a displigo d'ac'h, ma flaneden galed.

Oh ! pegen Kaer, etc.

C'houec'h vlavez warnugent, breman'zo tremenet

E Kwitaiz Kerne, Kerne ma Bro garet  
Evit mont da Vro C'hall da c'honit ma zamm boed

Oh ! pegen Kaer, etc.

Pebez tristidigez d'am c'halon a Vreizad  
Kwitat ma c'hoarezed, ma breurik ha ma zad  
Kwitat ma C'heriadenn, Kwitat bez ma Mamm-vad.

Oh ! pegen Kaer.

O devez a c'hlac'hар ! O devez a ganvo !  
Me'mo Koun dioute penn da benn d'am deio  
En Bered Kanuhel, me a skuilhaz daero

Oh ! pegen Ken Kaer.

Ha en garik Kintin, pa gemeriz an train  
Glac'haret ma c'halon da diou eur goude lein  
E c'houenniz malloz war al lankouned brein.

Oh ! pegen Kaer.

— 4 —

O deuz lacret d'am zud an ti toet en plouz  
Ar parko, ar prajo hag al lanneier rouz  
Ewar bere e vevaz ma C'hendado didrouz

Oh ! pegen Kaer.

An de warlerc'h vintin, pa oen me arruet  
Da c'honit ma brifenn en Bro an Normaned  
E œ diez ma C'halon e œ du ma Spered

Oh ! pegen Kaer.

Doue hepken ha me a oar an trubuilho  
Am oe bet da c'houzanvr (*Ken*) pell dimeuz hon Bro  
Disprizet gand an holl ha galvet da : *Vaho !*

Oh ! pegen Kaer.

Tremen 're war ma chouk, bee'hiou drest muzur  
Kouffredou savonez, sac'hadou 'daou-c'hant lur  
Ha me, paour kez Breizad, bean striz a natur

Oh ! pegen kaer.

Da viken am bo koun dimeuz an Normaned  
Azo potred jentil ha gwir gamaraded  
Pa ve krenvoc'h evité d'o derc'hel en resped

Oh ! pegen kaer.

Azo leun a fougé hag a fallagriez  
Pa welont e arru, divroet en ho zouez  
Eur paour kez Kernevad ouz a goste Keraez

Oh ! pegen kaer.

Koulskoude hon Rener, potr koz lemm a lagad  
A deuaz da hanveout buhan ma ioul vad  
Hag a roaz kentelio dar paour bihan Breizad

Oh ! pegen kaer.

Gant Kuzuilho ma Mestr hag e aliou mad  
'Tiskoiz d'an Normaned ec'hoaneur C'herneavad  
Em oa eur penn-kalet hag e oan Mab d'am zad

Oh ! pegen kaer.

Ar gerio latin pere am oa disket  
Gwechall en kanuhel d'an noz goude ma fred  
Breman a servij d'in da skaoda Gallaoued  
Oh ! pegen kaer.

Ha pa oan bet, d'am zro, eun tamm diweatoc'h  
Galvet, gant ma mestro, deur plasik uheloc'h  
E kaviz adarre, neuze kouls ha kentoc'h  
Oh ! pegen kaer.

Barz ar broio pell-ze siouaz ! a bep tort tud  
Diboell ha direzon, evel loened mud  
Gant troad ma skubelen 'n o lakiz war o C'hlud  
Oh ! pegen kaer, etc.

Falveout e raz d'è, en giz d'an aerouan  
Ma zapout en o laso da vevel da zatan  
Birviken, a dra zur, da ze nan asantan  
Oh ! pegen kaer, etc.

Kristen ac'hon ganet ha kristen e vevin  
Breizad a oa ma zad ha Breizad e choumin  
Gant bolante Doue katholik e varvin.  
Oh ! pegen kaer eo.

Daou dimeuz ma Mestro, didrue, di-galon  
O doa kasoni-vraz dimeuz ma Bro-vreton  
Gand ar fulor ar vrasa 'deuz goasket ac'hanon  
Oh ! pegen kaer, etc.

Me respountaz d'eze, evel eur Breizad ter  
D'ar Gall ha d'ar Moko, mirit ho plasoukaer :  
Me a chomo féal da gizio ma Bro ger  
Oh ! pegen kaer.

Pa 'm ezo tregont vlavez, tremenet evel se ;  
Dibunet ma C'huden e c'houlennin konje  
Da zistrein d'am Bro gaer, d'am Bro Uhel Gerné  
Oh ! pegen kaer.

— 6 —

Eno e klevin c'hoaz, kan kaer ar Mesaer  
O Vesaat e loened du-mân 'n hon lanneier  
Hag en Oabl, euz d'e benn ; mouezik an Alc'houeder

Oh ! pegen kaer, etc.

Pegen kaer e gwelet klec'hidi Breiz-Izel  
Rec'hel dantelezet skignet en aer Uhel  
Pleustret gand hon zadou, tailhet gand o C'hizel

Oh ! pegen kaer.

Me a vezo laouen, me a vo evuruz  
Pa glevin hon C'hleier gand o mouez dudiuze  
D'an noz ha da veure o son an Anjiluz

Oh ! pegen kaer.

Allaz ! eur gwall darvoud, ganin 'zo arruet  
Trevajou hon zud koz d'am zad a oe laeret  
Gant tud a galon griz o deuz hon rivinet

Oh ! pegen kaer.

Pa oen gand an dud kriz, distroadet a Gerne  
E klaskiz en Treger eul lojennik neve  
D'ai ec'h in da ziskwiz, d'achui ma buhe

Oh ! pegen kaer.

Kerne ha Laudreger, d'in me azo unan  
O diou c'h int izili deuz Breiz Izel vihan  
Da Vreiz ê ma c'halon, d'ezi ive ma C'han.

Oh ! pegen kaer.

Rag ma farouz. neve azo en Breiz-Izel  
Enni e oë ganet Fanch-Mari an Uhel  
Kenavo da Gerne, Kenavo, Kanuhel

Oh ! pegen kaer.

Kenavo Bered vad, en pelec'h e repoz  
Ma Mammik ha zad ha ma holl dudokoz  
D'am flaneden galed an Noblaz azo kaoz

Oh ! pegen kaer.

Me 'hanve, Koulskoude, tud pinvidik meurbed  
A labour a galon evid ar Vretoned  
D'ar re ze ma bennoz, me o c'haro bepred.

Oh ! pegen kaer.

Gloar d'an Noblansou mad azo choumet feal  
Da giz o c'hendadou, breman evel gwechall  
A gar o zrevaded dre garante léal

Oh ! pegen kaer.

Gloar d'an Estourbeillon, da Laig, da Gerville  
Kalan — Loth ha Vallée hag ar Guichardière  
A labour de ha noz d'adsevel hon Yez kaer.

Oh ! pegen kaer.

Pa deuy an dud pinvidik deuz hon Arvor garet  
Evel an Estourbeillon da sikour hon Barzed  
Ni a lako kaer-kaer yez koz ar Vretoned

Oh ! pegen kaer.

Breiziz an Hent-Houarn ma c'henvroiz karet  
D'ac'h e vo a dra zur, ma diwean kouplet  
Deut da hopal ganin : “ Bevet ar Vretoned ”

Oh ! pegen kaer, etc.

Kredit aliou mad ho mignon Penhouarn  
Gwir doujanz ha resped d'ar mistri hon gouarn  
Difennomp d'ar Mokos da grigi 'n hon skouarn

Oh ! pegen kaer.

Dalc'homp mignoniach hon Breudeur Gallaoued  
Holl a c'homph Fransizien, bugale d'ar Gelted  
Mez na lezomp morgen gwaski ar Vretoned.

Oh ! pegen kaer.

Ni a bev kouls hag int, “ kontribusono ”  
N'aotreomp ket dézê hon galver da : “ Vaho ”  
Rag giviriou peb Fransez ar Breizad a viro

Oh ! pegen kaer, Pegen kaer eo Ma Bro

